

# HANTER-CANTVET BLAVEZ EVEL PERSON

EUZ

An Aotro AR MOING, Person parouz Lanvellec

WAR DON : *Nin zo deud aman a galon vad...*

Ar c'hleier a glewan o son  
Wid ar gwel braz euz hon Ferson ;  
An Aotro 'n Eskop 'Zant-Briek  
A zo er gwel en Lanvellec.

Beleien ha tud a bep stad,  
A welomp, aman, o tostad  
Da oferen vraz hon Ferson,  
Laka da dridal hon c'halon.

Hanter-kant vla zo 'c'h eo person  
An Aotro Moing, hon gwir vignon ;  
Eiz-vla ha trégond, klewet mad,  
Ec'h eo hon Ferson hag hon zad.

Disket 'n 'euz dimp, en peb feson,  
Karout Doué en hon c'halon,  
Hag hon zerviji dé ha noz,  
Ewit gonid ar baradoz.

Hô ! buez hir hon Tad zantel  
Zo vel eur mirakl nin hen gwel :  
Er skeuden ze nin, wel bemdé,  
Hon Ferson koz gant karanté.

Vikel-Braz, Aotro Olier,  
Gred hoc'h euz dimp eur zarmon gaër  
Ha merket don en hon c'halon  
Ar vuez gaër euz hon Ferson.

Aotro 'n Eskop, a wir galon,  
Gred 'c'h euz Chaloni hon Ferson,  
Ewid he labourio poaniuz,  
Ha laked anomp évuruz.

Aotro 'n Eskop, trugarekad  
Ho réomp holl ewid hon zad,  
Goulen a réomp ho pennoz  
Warnomp ha war hon Ferson koz.

AR MERER TAD,

*Skeudenner en Lanhuon.*

Ar 15 a viz Du 1874.